



SAINT-GILDAS

Cast le 21 juillet 2002



### Kantik da Zant Ieltaz

DISKAN: O Sant Ieltaz, hor patron, selaouit hor pedenn,  
Gant fizians a greis kalon, ni ra d'eoc'h hor goulenn.  
warnomp, war dud hor parrez skuilhuit puih ho pennoz,  
Ma vo santel hor buhez, 'vit mont d'ar Baradoz.

1/ Siouaz ! 'vel en oc'h amzer  
Tud fall en hon touez  
'ra da lezenn hor Zalver  
Eur brezel didruez !  
Ho sikour a c'houlennomp  
'vit difenn hor feiz,  
Chomit ato ganeomp  
D'he ziwali en hor c'hreiz.

2/ O Sant Ieltaz benniget  
Dreist oñ ni a c'houlenn  
Beva ato unanet  
Gant al lezenn gristenn.  
N'hor beuz nemet eur galon  
Aman d'oc'h enori,  
N'hor be nemet eur galon  
Er bed all d'ho meuli.

3/ Tud euz hor bro Breiz-izel  
N'o doa ket c'hoaz klevet  
Komzou flour an Aviel  
A zibrad ar spered.  
Ha c'houi dre ho madelez  
Peus desket d'hon tud koz  
Lezenn blod ar garantez  
A gas d'ar baradoz.

4/ C'houi 'zo skedus er c'hloar  
Gant ar Zent en Envou  
Mes ganeomp war en douar  
E chomin ho relegou.  
Eul lodennig anezo  
'zo bet en hor barrez  
Eun tenzor bras e vezo  
Da gaërraat hor buhez.

